

Pleiben : an Ensavadur en he fezh



A-stroll tro dro d'an Iliz, e kaver : ur c'halvar a-bouez, un nor e stumm un valz-enor, ur garmel, un ti-sakr ha gwezhall e veze kavet ivez ar vered e-barzh.

Ar C'hloz-Parrez (pe Liorzh Iliz) a zo kelc'hiet gant ur vogerig da zifenn al loened da zont-tre.

Unan eus ar re vravañ ha klokañ e Breizh eo kloz-parrez Pleiben.

Disavet eo bet pep elfenn hennez etre ar c'hwezekvet hag an triwec'hvet kantvet, er mare ma veze galvet "oad aour an arzh Breizhad" e-korf teir prantad :

Amzeriañ savadurioù ar C'hloz-parrez :

Er XVvet Kantvet	1555	ar C'halvar
	1564-1583	an Iliz hag ar Garmel
Er XVIIvet Kantvet	1633-1642	Echudadenn ar Pratel hag an Tourveur mare an Adganedigezh
	1650	pinvidikadur ar C'halvar
Er XVIIIvet Kantvet	1719	an Ti-sakr
	1725	an Nor meurdezus pe "Porzh ar marv"
	1738	dilojadenn ar C'halvar

An Iliz :

Kalzig a labour adkempenn zo o paouez echuiñ. Bremañ neuze, e c'haller gwelladenniñ:

- An doenn koadek hag adlivet
- An traezhiegoù pe rizenn kizellet o skeudenniñ un heuliad maskloù leurennoù mitologieel a-dro da prantadoù levrioù ar sent pe c'hoazh leurennoù ar vuhez pemdeziek.

- Ar Sternioù-aoter : hini an Aoter-vras savet e 1667 a dedenn dre e pinvidigezh. E kreiz, un tabernakl, meur a soliadur warnañ, gant rizennoù, keleierigeroù ennañ, klinklet gant pennoù aelezig kizelet.
- Douget eo ar C'hrist adbuhezhet gant an aelez, evel ur gurunenn war pep tra.
- A-dreñv an aoter, ar Werenn-veur, peder lodenn o kontañ ar Basion-vras enni, adalek gwalc'hadenn treid an apostoled betek an adbuheziñ. Gwer-liv an tu kleiz a-ziskouez "gwezenn Jesse" pa ziskouez hini an tu dehoù un displegadenn eus komzoù Jezus : « Ar frouezh-gwin emañ, delioù anezhi emañoc'h-c'hwi ».
- Stern-aoter ar Rozera, e treuzenn an hanternoz zo bet savet gant arzhourien eus a-Bleiben.
- Delwenoù liesliv ha gwer-liv niverus, kement-a taolenoù eilet diwar skouer un diskenn groaz eus an naontekvet kantvet ha diwar ur pred e ti genlabourerien Emmaüs.
- Ar Chapel-badeziñ e penn-all an iliz.
- An Orgoù goulennet gant parrezidi Pleiben digant factour Tomaz Dallon e 1688, nevesaet evit ar benveg sonnerezh koulz hag al lodenn arrebeuri. Sonnadegoù niverus a vez klevet a-hed an hañv.

Diavaez an Iliz

En ur vont'maez d'an iliz dre ar pratell, e c'haller sellout pizh ouzh riz an apostoled ha kenderc'hell a zehoù, dre :

- Un Nor-meurdezus anvet « Porzh ar marv », volz-enor gwirion.
- War e dalbenn e vez kavet ar C'hrist engroazet, e vamm ha Sant Yann en dro dezhañ. War an tuoù kornog ha reter e tizoloer ur Piéta.
- Nepell diouzh an nor, ez eus ar Garmel, eus ar c'hwezekvet kantvet emañ-eñ, ha kaerañ garmel gotek Breizh-izel eo. Implijet eo bet da chapel ar re marvet, da skol, ha da vurev an ti-post zoken.
Er mare-mañ e kaver ennañ delwenoù hag un neubeut pezhioù adkavet e-pad mareoù an nevesadur. Neubeutig a Binvioù implijet e penn kentañ ar c'hantvet ivez.
- Ar c'halvar savet e 1555, div wech diblaset ; e 1642 da vare sevel an tourveur ha datvat e 1738.
- Dre ma ez eo savet e stumm ur volz-enor gant pevar troad, kalvar meurdezusañ Breizh a-bezh eo.
- Ar c'hizellañ bet graet e mein ar vro, gant gred Kersanton a-ziskouez Jezus, skeudenet a-hed e vuhez, hogen ma chom ar Basion-vras, an tem kreizel. Gwisket un neubeut a-dud gant dilhadoù mod-kozh ar vro er c'hwezekvet kantvet. Kuzuliañ a reomp deoc'h da grog ar welladenn en tu kreizteiz-su, kuit da genderc'hel dre ar reter, hanternoz ha neuze kornog hep disoñjal al leurennoù lakaet war lein o kontañ an engroaziañ.

A-raok kuitaat ar c'holz-parrez-mañ e c'haller teurel ur sell hollek war an illiz ha plediñ war an div dourenn kloc'h : unan breizhadez anezhi hag eben eus an adganedigezh. Gallout a c'haller ivez merzhout an ti-sakr savet e penn kentañ an triwec'hvet kantvet peuzsavet gant ur gloc'henn kelc'hiet. A-greiz ar c'hloz e weloc'h ur groaz unanderel ; anvet "kroaz an holen" rak gwerzhet e veze gwezhall war he dirri holen Gwenn-ran.